

# DISPUT NEVEZ

Savet etre daou zen Iouank

DIVOAR BENN EUN DIMEZI

Oar eun ton anaveet

Me a oa manet minor boe an oad a bemp bla,  
Ha breman me zo major, en oad da douch ma zra ;  
Mar choman pel den iouank a renkin bean tost,  
Pe achapo ma arc'hant pa na deus ket a lost.

Gwel eo din buan difen keit a meus eun tam treo  
Ha klask danfe eur fertun vo engal di a gleo  
Me hanve eur plac'h iouank a gavan deuz ma zouch ;  
Beza deuz en tam arc'hant ha oar a renk da douch.

Ma klaskan eur vas vielan, me vo brudet dre oll ;  
Pean mari dam imban, kement se gafan droll ;  
Mont ma unan e bete, ma na blijant quet deï,  
D'am refus deus liberte deus ket an droat da skeï.

*Ar Potr oc'h erruout e ti ar Plac'h iouank.*

Salud feumeulen iouank, dre gomzo Cupidon,  
Me meus poan ha nec'haman ken eo trist ma c'halon  
Me a zo deut d'ho koulou, ma akseptet ma c'hoz  
Nimp a lakao peden treman gant hon zud koz

*Ar Plac'h.*

Me a gredan ket den iouank, o pe eur galon trist,  
C'hui peus formet eun'diskour vit kaet eur banac'h jist ;  
Toulet zo eur variken vad, me gred ho poa klevet,  
Oar digare ober marc'had e torfed o sec'het.

*Ar Potr.*

Me n'eo ket'vit kaet boisson hon deut beteck aman,  
Respontet din ho rezon oar pez a c'houlou ;  
Beza meus okasion da feurmi eur c'houldri,  
Ne vank di met eur pichon'vit kommans ménagi.

*Ar Plac'h*

Oblijet hon da gredin rezonniou an dud coz :  
E krog o c'hoant dimezi prim vel eur bar drouk-kof ;  
C'houi zo deut surpris a mis d'am goulou den iouank,  
Evel kals ofrans o vouis da chapel Zant-Visant,

*Ar Potr.*

Aboe ma komansas Venus da bika ma c'halon,  
Pemb pla zo tremenet aboe est a melc'hon,  
Ho c'havizan ar merc'hed n'am beus kavet unam  
A defe ma zorc'hennet evel'oc'h, Mari-Jan.

*A Plac'h*

Klevet eta, Imari, ra golet ket oc'h amzer,  
Me c'ha d'ho tizorhenni pe eo dies ober.  
Me am boa ma c'hurunen da vonet d'ar bed-all,  
Gredan ket e timefin na doc'h na da re all.

Dimezi'n'amzer brezant zo mon en esklavac'h,  
Guir eo klaz antre contant en breuries kanac'h ;  
Pa ve'n dud oar marc'h fortun vent kamarado bras  
Hac eur veach groet ar c'hontrat vent oll vel ki a kas.

*Ar Potr.*

Daou den a ve kontradet gle beza vel unan,  
N'eum respecti, n'eum garout, vel Tisbé a Piram ;  
Mar gom choaset gant Doue vel Tobie ha Sara,  
A veofomp eun union hac accord oar bep tra.

*Ar Plac'h*

Vit damisa eun ouner be o froter dezi o zall,  
Koms broa : chom'ta, hoantennik, tap da droad den nall ;  
Eur vec'h prenet ann ugent, et ann asfi oar e fen,  
Oar en e renko kerzet pe gavet fest dar guevern.

*Ar Potr.*

Ann tol a zo difennet gand Doue ha gant ar bed.  
N'oullan ket kavet eun hano vel Albert-Pil-he-Vroeg  
Pehini nevoa houlennet, rog sina et gontrat,  
Ma bije mechant e vreg, kaet droet d'he filat.

*Aa Plac'h*

Kals a guemer ann droet-se hep goul permission ;  
Non quet da betra tamal ken bras disunion  
Na glever met an insul, a gourdrous hag an tol :  
Skouer fal'vit ar vugale ha scandalus d'an ôll.

*Ar Potr.*

Ar bet zo corrompet breman gant ar visso  
Hag ha dol had jalouisi en kals ar jardino.  
An ourgouil zo ken krenv ra dimp n'eun meprisan,  
Oll so hoant da gommandi ha den na c'houl pleguan.

*Ar Plac'h*

Evidon mê, ma dimezan, renki beza mestres,  
Mar ho peus c'hoant kommandi nomp bet mad assambles  
Hag ouspen he tivisten, rog beza kontradet,  
E ve red din kavet eur voetur n'an ket oar ar bidet.

*Ar Potr.*

Ia, ar merc'het zo breman, gar bezan guisquet mad  
Ha kotillon, ha brago, oll, o deuz c'hoant da gad :  
Ann toul, ar boutonno, ha commandi partout,  
Ha pa de débret ar mel, lan ar lipo ar poud.

*Ar Plac'h*

Enebon, beza zo groague renk guiska ar brago,  
Ma fiont re n'ho fotred dirigeant' r ménajo,  
Deufe abred ar ziel da goac'h toul anne alhue.  
Ha mont da chom da Langueux, da frita paourante.

*Ar Potr.*

Dre ze renkin kaet eur plac'h deus a goste a mor,  
A reze oar oll a sechret ha destumer en gor ;  
Prona guiskamant frezuz, condui eun dol rond,  
Ha tamal c'hoas da Isidor mar ga ar stal da fond.

*Ar Plac'h*

Ha c'hui, etre zoc'h potred, oar cleuza boutaillo.  
Kargan mad, ha chareal, d'an ostallerio :  
Goude dispignoc'h arc'hant rentet dal ha bouzar,  
Bete oar ann henn bras a diskaret ho kar.

*Ar Potr.*

N'en deus ket a introdu, vel groague Breiz-Izel,  
A reze o deus oll peb a filtr ha peb a sac'h flanel ;  
Goud a ouzont grilla kafe, implian koaven lez.  
Fonta suk en dour tom hag ober ze hep frez.

*Ar Plac'h*

C'hui'a zo eur mest koseer, c'hui rai c'hoas eun oac'h  
Evurus vo'r femeulen a c'halon oc'h attrap ;  
Vanko kel dezi a neudri pa vefet oar dro ar guer,  
Ha diboultret he dillad d'ar chouls ha d'ann amezet.

*Ar Potr.*

Mar me eur plac'h a fesson, vel meus esperans.  
Ma ve quiet faibl e bis da souffr he c'hallians,  
Beza d'ho he liberte, na vo quiet eslkaves ;  
Mes vit eur veal gafe na bermetin james.

*Ar Plac'h*

Neuze vo red dec'h ive renons d'ar guin-ardant,  
Ma c'helfet miret o pen hac ho c'hintentamant ;  
Ma be red dec'h kommandi hac ebarz hag er mez  
Nim groet vo dre ho losten a vo zilac'r lez.

*Ar Potr.*

Partout roï ma avis ha mont d'ar marc'hajo,  
Balamour da douch an arc'hant ha d'efan banac'ho ;  
Ha pa returni d'ar guer, mar be vroec'h fasset fal,  
A kommansi gana vit ober dei dansal.

*Ar Plac'h*

Mar gue vit ober boufon ho penz ezomp eur plac'h,  
Eo guet dac'h klask eur vates, a pa vo squiz ganac'h,  
A vo libr da bardan ha c'houi da glasqe en all ;  
Ha ma partife ho groeg e pe eun tam scandal.

*Ar Potr.*

O zur vroeg a mezo ben gouel Mikel quantan,  
Dec'h a ran o breferans, c'hui a mo mar gallan ;  
Na deut quiet da gredin, evit-hon da farsal,  
A me c'hoant d'ho poufonna, rak n'hon quiet eun den fal.

*Ar Plac'h*

Laret meus dec'h ma ide, na neum dislarant, quiet ;  
Gredan ket e timefen dec'h na da zen a bet :  
Konversin ran gand an dud da roulan iaouankis.  
Divezat vin pa t'houezan pa mo poazet ma bis.

*Ar Potr.*

Deus klevet ho proposiou, noc'h ket vit en dimezin.

*Ar Plac'h.*

Nan, a drazur, den iaouank, bivirken ze na rin.

*Ar Potr.*

Me sonje feurmi eur plas oar eun anou hon daou.

*Ar Plac'h*

Feurmet-han dec'h oc'h unan a peb hini n'e graou.

*Ar Potr.*

Neuze c'han da sortial, ken a vo plac'h iaouanck,  
Bed sekret oar guemen-ma hac em renfet kontant.  
Pa na non ket d'ho c'hide, red eo klask eun all.

*A Plac'h*

Breman oc'h libr d'ha vale keit a m'och dishual.

*Ar Potr a zorti ous n'em lavaret.*

Non ket oar besort koste ruilla ma boul,  
Me grede d'in oa merc'het en c'hoant dime a foul,  
Trompet eo bet ma gueno o santout a sort blas  
Lec'h ma sonjen ober mil, nebon meus groet kas.

Pevar mis oant bet en Paris, sernet gant an Prussianet,  
Na biskoas ar sort trubuul ma bet oar ma speret ;  
Bet aboa kals a viser hag eur bansion dreut,  
Goas eo din klevet breman man ma fri voar ar gleut.

Oar ben eiz devez goude, kanaouerien ma bro,  
A gri oll, a vouez huel ; potr egrouin, voar n'hon  
Obliget hon d'andurin, pez hou tapet en plan,  
Ma zenfen ouz ma humor, me rafe dei biskam.

Mes pa deus brudet a dost, me a vrudo a bel ;  
Me ha da gas eur chanson da vale Breiz Izel ;  
Ha tud iaouank ann Arvor, kouls vel koste ar c'hoad,  
A guemero plijadur da c'hoarsin oar ma stad.

*Propriété GUILLERMIC.*

# CHANSON NEVEZ

## Var sujet ur Filouter en deus tromplet e Hostis

### VAR UN TON NEVEZ

Me ho suppli, oll tud yaouanc, da zont da glevet  
Ur son meurbet divertissant a nevez composit,  
A so grêt da eun den yaouanc, ur filouter fin,  
Mer ententet, ar farç blesont a rei deoc'h c'hoarzin.

Aracet, eo, compagnunez, ober dioutan;  
Bete re a filouterien so dre ar vro mân :  
Nemet avertissa an oll hostisien  
Da zioual na zeuint da loja ar filouterien.

An den-mâ a voa brao guisquet, un den a fêçon;  
Me sonch dîn a voa guinidic de meus a Leon :  
Squis e voa er guer, re vanguet, meur a hini so,  
M'en deus laquet en e speret mont da redeç bro.

E Montroulez hac e Guengamp, e Treguer eo bet,  
E Sant-Malo, hac e Dinan, hac e San-Briec;  
Partout oa clasq e fortun o poursu e chanç,  
Arc'hant en doa casset gantan bars en abondanç.

Baleet en deus Paris, ar filouter fin :  
E yalc'h a so deut da blada souden alafin :  
Distroet eo bet d'an Naonet, ha bet e Roazon,  
Hac enfin e zeo bet manquet e bourvission.

Evel ma roa bet costumet da ober cher vat,  
Evit a verch a voa maguet calz re dilicat,  
E quemeras effrontiri da c'houlen loja  
Ebars en eun hostaliri, n'oa dîner gantâ.

Evel ma voa qer brao guisquet, en ty eo antreet  
Bonsoir, emezan, va hostis a me vo loget ?  
Coania fell dîn em plijadur en-ti ma fennos,  
Hac ivez eva ur banne ebars n'em repos.

Servichet, eme an hostis, va mignon autreet  
Servichet, e viot a dra certain ar pez a guerfet :  
Azeit amâ en ur gador e quichen an tân ;  
Qemeret ur banne da eva da c'hortos ho coan.

Servichet e oe va mignon eus ia guement mad  
A zesire e galonic a daou delicat,  
Gwin Bourdel demeus ar guella, hac ive gwin Spagn  
Ha liqueur an excellenta tout da vad ar c'hagn,

P'en devoa debret hac evet, c'hoariet e roll,  
D'ar plac'h en deveus lavaret : diservichit an doll :  
Mennit ho plajou, boutaillou, ivez ho cueren,  
Va c'hassit d'am c'hampr d'a gousquet d'ur guele qempen

Amâ e commenças nec'hi breman den yaouanc,  
Penaus e pêje e hostis, n'en devoa qet arc'hant  
Evet e meus gwin, emezan, ga grêt a meus cher  
Petra ein-me evit paea, n'emeus qet un dîner ?

Epad an noz en e vele e oa chagrinet,  
O sonjal en e beamant, n'elle qet cousquet :  
N'allin qet mont eus an-ti-ma certain e nep guis,  
Ma de allân caout ur moyen d'a bana'n hostis.

Guelit brêma ar finessa eus ar filouter fin :  
Un diou pe deir heur qen tan dec yas er jardin  
Buan e zeo bet commancet da doulla an douar,  
E vragou en deveus plantet tout se ractal.

P'en doa enterret e vragou, e yas en e vele,  
N'euze n'em laqas da gousquet da c'hotos an de :  
Goud a rê mad, ar filouter, e teuje aben  
Da ober d'an hostis pa ea ar scot pen-da-ben.

Antronos vintin pas savas evit partial,  
Pa ne gave qet e vregou, commanç crial :  
Fort ! va mignonet, emezân : sicour, me ho ped,  
Ha va arc'hant ha va bragou a zo tout laeret.

An hostis hac en hostises d'an nec'h so pignet :  
Chomet e repos, d'en yaouanc petra so c'hoarveet ?  
Hac e ve collet ho pragou, se n'en deo netra,  
Arabat eo en deceria, ni ya da baea.

N'en d'eo ket hep ken ar bragou am gra chagrinet  
Va oll arc'hant a voa ennam : me so revinet  
Beza oa certain en arc'haat hag en aour melen  
Daou c'hant skoed, ha pevar real n'em gave ouspen.

Fouillet e oa bet dre an ty ar sevicherin,  
Mevel, mates, pot marchossi, bugale ouspen,  
En oa sur deus a effer a grie bepred :  
Penaus e zin-me d'am c'hartier, iout ezon laeret.

Entendit emeza hostis, bars e ber langach :  
Ma na rentit din va bragou, me rei deoc'h dommach;  
Evidon me gavo testou, pa vanqfe kant din  
Penos ne oan ket divragou p'hon deut d'ho ty

Evidon me zo den honest, mar deus er c'hontre,  
Ne fell ket din ho revina, pell dioc'h kement-se;  
Roit din eur bragou mezer ha kant skoet ouspen,  
Me bardono deoc'h an anter ne c'houlennan ken.

An hostis hag an hostises eus a galon vad  
A gont dezant prest e gantskoet tout en eur yalc'had,  
Hac ive eur bragou nevez eus a vezer Saoz ;  
Ar filoud eo c'hemer buan, pa oa mad e gaos.

Rei a rejont da zijuna dezan kent partia ;  
P'an doa pardonet an anter, o devoa joa outa ;

Pront hep sellet en dro dezhan e z'eo bet partiet ;  
Kenavo, hostises, emezan d'ar c'henta gulet.

Abars nemeur goude an hosti o terri ar jardin,  
En deus kavet en douar bragou ar potr fin :  
Hag en ho kommas da grial eus a boues he benn :  
Ema zo tro eur flouter ! ha me so eun azen.

Kement hostis zo er vro man a rankfe donet  
Da ober goab eus ac'hanon ; brema me zo baro tiet ;  
Kollet o meus eta kant skoet, eur bragou mezer,  
Ha c'hoas meus lardet e gof d'am fripon tam laër.

Bremas teuan da avertissa an oll Hostisien  
Ma tiouallint dre kement ma eus ar flouterien :  
Na dleont ket en em facha evit e glevet,  
Din-me va unan ar goaza, me zo goal diet.

---

---

## CHANSON ROLAND

---

Red eo a lavare guech all  
Roland pried tener Izabel  
Red eo me a renk partial  
A monet dan Turquie d'ar brezel (bis)

Guelo a rez dimet breman  
A kaon a rez di var da venon  
Un all ben eur pennad aman  
A zeuio da zeha piz da deoulou (bis)

Neo ket possubl d'eoeh a vanckfen  
E neur oela e me Isabel  
D'eoeh a vezi d'a virviken  
Na pa vech maro bepred fidel (bis)

Mar teufen da ankounehat  
An hini a meuz kemen karat  
Da zeui dirag va daou lagat  
Ouspez da reproch di va vehet (bis)

Mar timean var ma devez  
Er banquet em hichen azezet  
Deut da gass a hano d'ar bez  
A lavaret vo me ho pried (bis)

Roland a zo maro siouaz  
Izabel a deuz kaon a anken  
Ne oa ket echu mad ar bloaz  
Mar teuz eur marquis di goulen (bis)

He renk hehenet hi arhant  
A zallaz kalon a intanvez  
Rei a ra hi honsentenman  
A sinet a oa an devez (bis)

Ar herend e nomb assemblet  
Ar banquet a gommenças souden  
Ne ouienck ket hoaz peur azezet  
Un oficer oa e no hichen (bis)

Spontuz braz a oa o velet  
Er hisset guisket he nouarn  
Evelse tout oa goloet  
Kerkoulz e vizach ag e zaouarn (bis)

An den nevez ken souezet  
En deuz lavaret he nor grenn  
Tennet o casq me o ped  
Ag azezet ganeomp da leigna (bis)

E casq pa en deuz tennet  
Oa beb euz horoll meur bed hoero  
Scrigal a ra tout an neuret  
Ho velat bizaj hon den maro (bis)

E ni zao plom an den maro  
A zellet parfait deuz Izabel  
Zel e mezan zel ouzan piz  
Me eo Roland lazet er brezel (bis)

Dimet guech all pa promettet  
Na pa zigouech et gane mervel  
Biken pried all na piget  
A dimet vigeh chomet fidel (bis)

Asten a ra hi zorn pounner  
Ker a deuz crial a deplori  
Gand an douarn he zeui lonket  
A hoaz ho klever ho hirvoudi (bis)

An den man zo chomet mantred  
Ag a neuz lared ben partial  
Me a zo eun den goal dapet  
Ag a neuz eur sor deuz an trista (bis)

Izabel a deut di bep bloaz  
Guisket evelt mont da eureugi  
O crial ato goassoh hoaz  
Ar pez a ziscroq morse deuz outi (bis)

*A baouet den rag aoen mervel  
Ne deuz great demeuranz er c'hastel*